

Carné (Adrien de Crané (Brést 1854 – Bourg-la-Reine 1953) D'or barz karet.1912.
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

D'or barz karet¹

Me a blj din kleved o sevel kan laouen
Eur vamm a luskella kavell he bugelig.
Eun ebat eo selaou, e skourrou eun dervenn,
Da sklêr al loar, e-pad an noz hlaz, an eostik.

Ar plah yaouank, pa gan eur werz a garantez
A laka da ziskenn, em halon, eun dudi ;
Me 'gar ar barr-avel pa drouz a-dreuz ar gwez
Ar hleier o seni, ar mor oh hirvoudi.

Kloh benniget, gwagenn glemmuz, trouz an avel,
Geiz an evnedigou, soniou flour ar merhed,
Piou oh 'ta, e-keñver eur vouez all, mouez santel
Ar barz a zo ennañ galloud braz ar Spered ?

Ho mouez eo, a-wechou kreñv, a-wechou lirzin.
Deoh he-deus kinniget Breiz he zelenn aour glan,
An delenn ma weler warni,o vousec'hoarzin,
Eur harlantez bleun brug kemmesket gand bleun lann.

¹ D'or barz karet : Tiercelin.